


TAOLENNOU EUS ISTOR BREIZ

(Ijinet gant E. Boisecq)

50^{vet} miliad


Skeudennet gant Herri KAOUISIN hag E. ar GELLEG. — Kinniget gant "Kevredigez Danvezioù Kernew", Kemper.



Ar Gelled, hon tadoù-koz, kuitaet Breiz-Veur ganto, a zeu da zouara en Arvorig e-kerz ar vst Kantved; sevel a reont Breiz, hor bro, gant skoazell hor Sent brudetañ : Kaourintin, Pol, Tudal, Brieg, Malo, Arzel, ha kalz re all.



Ar Franked, degouezet e Bro-C'hall nebeut amzer goude, a glask tenna o bro digant ar Vretoned. Trec'het int evit mat e Ballon, tost da Redon, er bloaz 845, gant ar roue NEVENOE a ra d'ezo tec'hout tost da vat betek Pariz.



Tremen a ra hanter-kant vloaz efrusted. Goude e teu an Normaned fallakr ha laer war o bagoù lijer da zismantra ar vro a-bez. Tec'hout a ra ar venec'h d'ar broioù all en eur gas ganto relegoù hor Sent koz.



Er bloaz 937 ew kannaet ha kaset kuit an Normaned gant an Dug Alan Varvek hag ar manac'h Yann Landevenneg. An Naoned a zo lakaet da gêr-benn ar vro hag ar binvidigez a zeu endro e Breiz.




Sant Erwan a zo barner e Kêr Landreger (1305). Bez' e voe madoberour ar beorien hag eur Breton tomm e galon ouz e vro. Eun iliz a zo bet savet en e enor e Rom : hini sant Erwan ar Vretoned.



Goude ma voe bet ar peoc'h o ren epad 400 vloaz, brezel hir « Herez Vreiz » a zegas trubuilh en hor bro. Lakaet ew an tan gant Janed Flamm, an Dugez kalonek, e kamp ar C'hallaoued kelc'hiet ganto kêr an Henbont. Eun taol-kaer all c'hoaz e voe Emgann an Tregont.




Er bloaz 1378, Charlez V, roue Bro-C'hall, a fell d'ezañ lakaat e graban war hor bro. En em unani a ra ar Vretoned, e Dinarz, endro d'an Dug Yann IV da zifenn frankiz Breiz hag ober a reont d'ar C'hallaoued anzav ar frankiz-se.



Er xv^{vet} Kantved emañ Breiz en he c'haerañ. E amzer an Duged Yann IV ha Yann V e red tud-a-vor dispart hor bro dre ar bed o tegas ganto da Vreiz traou prizius eus ar broioù pell. Lavaret e vez : « El-lec'h ma tremen an heol e tremen ar Vretoned ».




Ar roue Loeiz XI a glask an tu, en aner avat, da lakaat Breiz ar vro binvidik, da suja d'ezañ. Koulskoude, er bloaz 1488, Charlez VIII, war e lerc'h, a zeu a-benn da ganna ar Vretoned e sant Albin an Hillber, tost da Roazon. Mervel a ra hon Dug Fransez II gant ar rann-galon.



Anna Vreiz, emzivadez d'he 12 vloaz, a gendalc'h gant ar brezel epad 3 bloaz. Neuze evit echui ar lazerez hag an dismantr, ez asant dimezi gant Charlez VIII. Derc'hel a ra soñj c'hoaz ar Vretoned eus o Dugez Vat.



Dimezi a ra he merc'h Glaoda gant Fransez Kenta. Eur skrid-emglew, sinet er bloaz 1532, a leze gant Breiz he frankizoù, da lavarout ew ar gwir d'en em ren hec'h-unan daoust d'ezi da veza bet lakaet dindan beli Bro-C'hall.



Gaou a raer alies ouz ar frankizoù-se, en em sewel a ra ar bobl ha bec'h a zo adarre. E amzer Loeiz XIV e tiroll Reveulzi ar Paper-Timbr renet gant Ar Balp, eun noter eus Karaez. Kalz tfez a zo diskaret e Roazon ha tud krouget e-leiz, — ar pezh a blijas, hervez doare, d'an Itron a Sévigné.



Er bloaz 1720, pouezusoc'h reuz eget diagent. Ar Vretoned a fell d'ezo distaga o bro diouz Bro-C'hall. Ar re a oa en o fenn, Pontkalleg, Kouedig, Talhouet ha Montloez a zo gwerzet gant trubarded ha dibennet en Naoned, war leur-gêr ar Bouffay.



Betek an Dispac'h Bras e voe difennet kalonek gwirioù Breiz gant ar Breudoù, e Roazon. Er bloaz 1791, e rank ar Chouanted en em sevel da stourm evit o feiz hag o gwir zoken da chom Bretoned. Pennoù-bras ar vro a zo neuze Ar Roueri ha Kaoudal.



Adalek miz Eost 1914 betek miz Du 1918, brezel er bed-holl. Merwel a ra 240.000 Breton evit Bro-C'hall hag ar Frankiz ; frankiz Polonia, hini an Alzas! Kalz tud o devoa fizians e vije bet graet ivez eun dra bennak evit Breiz.



Diskouezet en deus da vihana ar brezel-mañ d'ar Vretoned ez int tud talvoudus ha kalonek, eun dra ankouezet re vuan. Splann ew dirazomp amzer da zont hor Breiz, bugale! Feal bopred da vertuzioù ar Ouenn, en em vodit endro da vanniel gwern ha du ar Vretoned kalonek ha kreñv.